

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

30. AR PRINCESS A VOETOU

(follennoù 97 - 99)

Na sellaouet hag he kleffet cana
 Eur chanson neve komposet vid ar bla,

Nag a zo greed deun dichentil iaouank
 Ho distrei deus arme e kleo eur plac'h iaouank

O kana er menes

- Kanit plac'h brao, kanit ho kanaouen
 Kanit ho chanson, kanit a boës ho pen.

- Salokras, otrou, evit kana na rin ket
 Rag diouzoc'h a depend, me a gred.

Rag o douç koant zo neve dimeet.

- Dallit, plac'h brao, na recevit kant skoet,
 Kanit ho chanson, a kanit-hi bopret.

Ma ne kaven ket eur messajer fidel
 Hag a kasfe dam douç koant eul liser

Da lavaret dei e zon erru dar ger.

- Dallit, plac'h brao, na dallit eul liser
 Da lavaret dec'h e arri n'otro d'ar ger.

- Arsa, va mam, na potra vezogret ?
 Man erru dar ger an otro annavezet.

Kit-tu, va mam, en ho kamb huellan
 Da c'houd a c'houi hen goelo divarc'ha.

- Ia, ma merc'h, me a vel erru an otrou
 Ha de fin he potred anter kant kavalier.

- Dellit, va mam, dellit va alc'hoëchou;
 Kit-tu dam c'hamb da kerc'het lisseriou
 Rag bremaïk me ia da souffr ar maro.

Ar-ça, va c'hoar, gwisk va habid inkarnal
Vit ma zi er soll ia en da formal.

- Na Debonjour a joa bras en ti-man
Ar princess ahalen nag e pelec'h eman

- Nag a liou nag a kavan chenjet
Na mab pe verc'h hi a deveus ganet ?

- Salokras, otro, va exkusi a red
Seiz mis anter gant an derchen on bed.

Va zad a va mam zo aman dam dislavaret :
Na mab na merc'h me na neveus ganet.

- Gaou a leveres a kreiz ta zaoulagad
Rag me a meus klevet, nag ives a beurs vad.

Hag in kregi en e pognard arc'hant
Ha sinkla nei en kalon he zous koant.

- Dem-ni ac'han, dem-ni en om dro
Pa om deus lazet ar Princess a Voëto

Sonnet, soudardet, sonnet ho trompillou
Pa zeo maro ar Princess a Voëtou

Sonnit-tu kleïer, na sonnit-tu glazou
Pa zeo maro ar Princess a Voëtou.

—————
VVVVVVVVVV

Jannet Kerguiduff, 24 Xbre 1850

—————
VVVVVVVVVVVV